

Badeziant « Breizadig »



War don : Ar e'hloc'h a son.

1

Kloc'h bras Gras biskoaz voe klevet,
 Gant badeziant na gant eured,
 O son evel ma ra hirie ;
 Trelatet sur eo, war ma fe !

DISKAN

Sonet, kleier, d'ar « Breizadig »
 Hag a zo ganet bremaik ;
 Hirie man de ar vadeziant ;
 E brall, kleier, ha sonet drant !

2

Ar poupouig 'zo koant achu,
Vel ar bleun-brug e zioujod ru ;
E vantell gwenn 'vel herminig,
Eur groaz aour war e galonig.

3

Ar paeron, — na pebez enor !
Eus noblans Marc'heien Arvor :
Otrou d'Herbais, mêt ar Faved,
Brudet bras 'touez ar Vretoned.

4

Ar vaeronez, — sonet, kleier !
Eo Jenovefa a Sant-Per ;
Eus Mene Du da Vene Bre,
Ez eo meulet an hano-se !

5

Ha 'vit badezour, pebez gras !
Hon Otrou Bellec, vikêl-vras....
Nag a eurvad en devo bet
Breizadig o tont war ar bed !...

6

Tud a bep korn a Vreiz-Izel
Dastumet endro d'e gavel,
Oc'h ober allazig ha cher,
Gant komzou flour, sellou tener !...
.....

7

En parrouz Gras 'zo eur person
Hag en deus joa leiz e galon ;
Danzeet 'n eus eun devez kaer,
Pell dreist da gement a weler.

8

Evit achui, Bretoned,
Me 'lâro d'ec'h 'r pezh 'm eus klevet...
An eil d'egile a lavar :
« 'N Otrou Loyer 'n eus ket e bar ! »

D. N. D.